



Kenurzhier-kenurzhierez ar skignañ

Emañ Radio Bro Gwened o klask ur c'henurzhier / genurzhierez ar skignañ adal ar 1^{añ} a viz east 2017

An hini tutaet a labouro :

- darnamzer (104h miziek) e-pad 9 miz etre ar 1^{añ} a viz east 2017 hag an 31 a viz meurzh 2018, war-un-dro gant ar genurzhierez war ar post,
- ha goude leuñ amzer (35h) adal ar 1^{añ} a viz ebrel 2018 pa yay kuit ar genurzhierez a vremañ.

Ar c'henurzhier / genurzhierez a vo e karg ag ar c'hefridiou-mañ :

1) Diorrenañ

Diorrenañ, dre ar c'hevelerezh, brud ar radio hag he emrenezh arc'hantel en ur c'houarn he identelezh divyezhek, kevredigezhel ha dizalc'h.

2) Kenurzhiañ

Kenurzhiañ ur skipailhad tud gopret hag tud a-youl vat en ur gevredigezh.

3) Skignañ

Kenurzhiañ ar programañ ha kas un abadenn bemdeziek.

4) Merañ ar velestradurezh

Barregezhioù goulennet

- gellout bevaat ha sterniañ ur skipailh,
- kaout skiant-prenet e bed ar radio,
- anavout mat en-dro sevenadurel ha sokio-ekonomikel an tiriad,
- anavout mat bed ar c'hevredigezhioù hag e vont- en-dro,
- kaout ur live mat estaolañ dre gomz ha dre skrid ,
- bout en e aes e brezhoneg a vehe priziet, a modarall e vo kinniget ur stummadur,
- mestroniañ ar c'hompoderezh (meziantoù burevek ha micherel),
- kaout an aotre da gondou dre ret.

Gopr

Feuriader 174 hervez kenemglev-micher ar skingas radio, da lâret eo 14,55€ kriz dre euriad.

An emstrivadurioù (lizher emginnig ha CV) zo da gas da sekretourva@radio-bro-gwened.com
a-raok an 31 a viz meurzh 2017